



RELATION

Veritable ha profitabl evit an oll da ober reparation da Zoue demeus ar sacrilejou ha profanationou a goumeter a enep e Vajeste, abalamour d'ar c'hrimou coumetet er bloa-màn gant pêvar den maleürus, e parres Sant-Georch, tost d'ar guær a Libourn, en Escopti Bourdel.

Var ton : Cantic an Eternite.

EN hano Doue, christenien tostait da glêvet
Maleurion ar re vrassa a zo bet c'hoarvezet
Gant Pêvar den dirollet, coumetet er bloa-mâ :
Lacat a reont an ên, an douar da grena.

Qent commanç, e c'houlennàn pardon digant Doue,
Eus ar Verc'hes glorius, ar Zent hac an Æle,
Gant aoun rac justic Doue na zeufe d'am punissa,
Va c'halon euz e gompren a deu d'en em ranna.

Ennoc'h, ô Mam druezus ! e lacàn va esperanç,
Evit ma em bezo digant Doue assistanç.
Ma ellin, dre ho sicour, cavet ar sclêrijen
Da explica qement-mâ etouez ar gristenien.

Mont a rân da gommanç disclêria en antier,
Pa ro din an asistanç va Doue, va Zalver,
Ar maleuriou êruet en escopti Bourdel,
En parros, eus a Sant-Georch, an ugent a Ebrel.

Er bârros-se e voa eur Person, eun den santel,
A asiste ar beorien gant eur galon fidel,
Dre ma voa carguet ar vrô a guernes ha miser,
E soulaje ar beorien balamour d'hor Zalver.

Pêvar den maleürus, goude débri o danve,
Renoncet da Jesus, abandonet o ene,
Evit servicha Satan leun eus a fallagries,
A lacas en o speret da vonet da laeres.

Ar pêvar brigant-mâ a goncluas neuze
Dont da dy ar Person, pa vouient an doare,
Gantàn emâ an alc'hoiou deus ar sacristiri,
Ha ni a yêlo en nôs da laëras an ilis.

Clêvit ta pebes ardou o deveus invantet :
Abers an drouc-speret evit ne vint get anavet
Mont da brena cos-dillat, en em wisca en bêvien,
Ha mont da d'y ar Person da c'houlén aluzen.

Ar Person carantezus o recevas neuze
Evel memprou da Jesus, en e dy gant carante,
A roas dezo da goannia, ivez en deus o lojet,
Hep consideri ar sonch eus an dud milliguet.

Ous en em gonclui, hep sônjal d'ar repos,
Neuze int bet savet vardro an anter-nôs ;
Forcet ô deveus ar gampr elec'h edoa ar mevel,
Hac o deus er massacret eus a doliou contel.

Neuze' teujont d'ar plac'h, cousqet en e goele,
O deveus-hi massacret, hep caout outi true;
Beuzet oll en e goad, astennet var leur an ty,
Ha laqet en eur bern hac ar mevel hac hi.

Neuze e zint pignet ebars cambr ar Person,
O deveus er garrotet, hep caout compassion ;
Staguet ebars en eur gador, hac e dreid en tân,
Laëret an alc'hoiou qemeret digantàn.

Ha p'o deus bet laëret an oll arc'hantiri,
Ar Pêvar maleürus a yas d'ar sacristiri :
Croasiou arc'hant, lampr, calizr, ezançouerou,
Chappou hac ornamançhou eus an oll auterion.

Ar pêvar den maleürus, gant an diaoul possedet,
A yas d'attaqi Jesus en tabernacl beniguet ;
Ar soleil hac ar ciboar o deveus bet qemeret,
Au hostiou adorabl o deveus profanet.

Gouelomp, oll tud devot pere a gar Jesus,
O velet un torfet qer cruel ha spouronus,
Pini a laqa an ên hac an douar da grena :
Sclassi a ra va goad, n'ellàn mui explica.

Crena ra va c'halon o velet an dud maleürus
O fouli gant o zreid corf santel va Jesus ;
Ne oun qet penos Doue na zeu d'o funissa,
Pe digueri an douar evit crenn o lonca.

Hollà ! tud maleürus, bourrevien arrajet,
Petra rit da gorf Jesus, en deveus ho crouet ?
Goassoc'h oc'h eguet Judas, pehini zo daonet,
Da attaqi var e dron hor Zalver biniguet.

Retorn a ra brêmâ ar pêvar den cruel
Da zisqueus d'ar Person an ornamanhou santel ;
En instant ma o güelas, e rannas e galon,
Ma commenças da ober dezo instruction.

An den santel afflijet a lavaras dêze :
Pa noc'h eus aon razòn, bet ouz justic Doue.
An arrach en o c'halon a zo bet antreet,
Hac unan gant eur gontel en deus en dibennet.

E benn santel hac e gorf o deveus bet tolet
Ebars en eun tan bras evit bea dêvet,
O sònjal penos bigen ne vijent disoloet ;
E vontr aour hac e arc'hant o deveus bet laëret.

Mes Doue, ouz pehini ne zeus netra cuzet,
A bermetas ma vije o c'hrimou anaveet,
Ma teuas eus ar barres daou den en un instant
De glasq an Autrou Person da gaç ar sacramant.

An dud-mâ pa veljont an dorojou digoret,
Hac an ty leun a voad, o c'halon zo rannet ;
Mont a rejont da avertissa an oll amezeyen,
Ma teuas gante assembles vardro daou-uguent den.

Pa Antrejont en ty, o c'halon zo rannet
O velet an tân bras pini a voa alumet,
Hac ar Person en e greiz a voa cazi dêvet,
Hac ar plac'h hac ar mevel en o goad astennet.

Garrotet voent neuze hep caout compassion,
Cunduet da Libourn ha laqet er prison ;
Aben seitec dez goude o froces zo jujet.
Dre arrêr ar parlamant da vea punisset.

Condaonet voent neuze gant parlamant Bourdel
Da gaout ar question evit o c'hrimou cruel ;
Rostet betec o daoulin, true voa o c'hlêvet
O crial, o vouela, oc'h ansao o fec'het

Neuze' voent condaonet, ar pêvar miserabl,
Gant torchou alumet d'ober amand enorabl,
Gant un durgez o ivinou dezo a voe tennet,
Ha troc'het o biziet, true voa o c'hlêvet.

Neuze var ar blacen e voent bet cunduet,
Laqet en o c'herc'hen peb a roched souffret,
Laqet en pêvar dân evit bea dêvet,
Hac al ludu anê gant an avel güentet.

C'houi, tadou ha mamou o deveus bugale,
Disqit-o da veva e carante Doue.
Evit goude ar maro ma zeot da repos
Gant ar Zent hac an Æles en gloar ar Barados.





CANTIC SPIRITUEL

Var sujet Apparition ar VERC'HEZ en Escopti a Artoa, an devez qenta a vis even 1768.

Var ton : Guertz Sant Ugen.

Meulet ra vezo an Drindet, Tad, Mab ha Speret-Santel,
Ha c'houi ive, Guerc'hez fidel, pa oc'h en em aparisset
C'hoas etoues ar gristenien, evit gallout o zouten.

Aboem'oc'h eus ganet ho Mabebarseurc'hraoudister,
Biscoas den e nep carter n'en devoe an enor d'ho quelet
Nemet er bloa-mâ eürus oc'h n'em disqueuzet, Mam Jesus.

Didostait amâ, christenien, c'houi tud devot da Vari,
Da renta ho meuleudi d'ar güir Rouanes souveren;
En Escopti a Artoa e deveus laqet calz a joa.

Er vilajen eus a Moutier, un den honest meurbet,
Pinvidic bras, en effet, pehini a gare Doue,
E joa voa da soulaji ar beorien en o anui.

Seulvui ma ro an aluzen, seulvui e cresq e zanve;
Benediction Doue a zo varneàn a dra certen,
Pa soulaje ar memprou eus a Jesus, hon Autrou.

An den-mâ en devoa pedet qerent hac amezeyen,
An deiz qenta a even, da zont da ober eur banqet
Eus eur c'hontrat en devoa da zemezi eur mab dezâ.

Pa edo ar gompagnunez tout o coannia,
E teuas da c'houlen loja hor Mam beniguet ar Verc'hes,
Hep bea anaveet, rac paour bras e voa güisqet.

Etre e divrac'h e tougue oll joaüstet an Æle;
Silvidiguez ar bed oll, Jesus-Christ, güir Vab da Zoue,
Gant eur visach caër ha charmant, ha paour bras en
e viscamant.

En instant m'e deus goulennet digant ar mestreus an ty,

Va lojit, me ho suppli, evit un nôs, mar permetet,
Elec'h ma vo polonte : paëet e viot gant Doue.

An den mâ leun a garante en andret ar beorien guéz,
En deus lavaret d'ar Verc'hes, ia, hep ne anaye ;
Ia, emeàn, deut en ty, m'ho lojo ho mab ha c'houi.

Dre an dorn en d'oa-hi qemeret ha laqet da azea,
E-unan a guemeras Jesus, hor Zalver benignet,
D'e laqat var e varlen ; hemâ an enor, christenien !

Seulvui eselle ar c'hrouadur, seulvui caeroc'h er c'have,
Ravisset e voa e ene, e galon zo en plijadur,
Ouz er guelet qer charmant, qer caër, qer ravissant.

E-unan en deveus-hi pedet : Dêbrit ive, emezàn ;
Mes hi o trugarecât, ne devoa na naon na sec'het ;
Mes calz a blijadurez o velet ar gompagnunez.

Pa voe ar repas êchuët, e c'houlennas diganti :
Lavarit, me ho suppli, a belc'h oc'h mar permetet,
Ha pez hano oc'h hanvet, ive da belec'h e yet.

A noblanç vras oun, emezi, guinidic a Galile,
Evit lavarat güirione, a dra sur oun hanvet Mari,
Hac e zòn deut gant va Mab da zigaç eur c'hêlou mad.

Eur mignon a meus, emei, a dle caout heritach,
Ha c'hoas ive davantach, ar propriete eus e dy,
Pa zeo bet trugarezus en andret memprou Jesus.

Ar re-ze o deus pedet ha gonezet evintâ
An heritach ar gaera pehini a dle da gavet ;
Qent m'êchuo an eiz de, sônjit man en qementse.

An den-mâ hep bea sônjet neuze ebars er recit-se,
Qer brofitapl d'e ene, outi en deveus goulennet
Ha bras voa ar baourente dre ar vrô ma tremene.

Peguement benac, emezi, e zeo fachet hon Doue
Ouz ar pec'her, nôs ha de ne ra nement e offansi,
Eo prest c'hoas da rêi pardon, ma er goulen a galon.

E bouvoar hac e vadelez zo en tu-all d'ar valiç ;
Mar meritomp ar suppliç, e ma c'hoas leun a vadelez,
Ne vanq qet da furnissa peadra evit beva.

E bouvoar hac e vadelez zo en tu-all d'ar valiç,
Mar meritomp ar suppliç, e ma c'hoas leun a vadelez,
Ne vanq qet da fournissa peadra evit e veva.

Ar gurun en deus gourdrouset ha revinet ho tier,
Ar grizill hac an avel o deus iffamet ar c'hartier,
Ar glo hac an dour qer bras n'eo güelet ennàn biscoas.

Eun nombr bras a vatiman chou a zo collet dre ar môr,
Hep gallout en em zicour, ar maro subit a veler
O caç hoc'h amezeyen d'an douar a dra certen.

En eur guêr, brezel ha qernez a veler dre ar c'hartier,
Hac ive qement maleur pere êru gant ar pec'her,
Zo avertissaman chou a êru abers hon Autrou.

Mes va mignon, m'o suppli, dalc'hit sònj eus va
c'homzou ;
Ne diñ qet faribolennou pere a elfe da ziferi,
Gant Doue int lavaret da zisclêria var ar bed.

Teir bloavez ho po assuret en abondanç eus a bep traou,
Qement zo ret da veva, an oll a vo rejouisset ;
Güinis, segal ha pep had, tout e vezo marc'hat mad.

Qement a vezo o commerci a vezo oll rejouisset,
O velet anê calonec, hep tristidiguez nac annui ;
Ebars e rouantelez Franç e vezo rejouissanç.

Eun abondanç a faveuriou a zisqenno eus an êe ;
En em rejouissomp, hirie, Doue a royo deomp e c'hraçou
Goulennit ountàn pardon, ha pedit-én a galon.

Na guemerit qet va c'homzou vit fablennou, mar qerit,
Qer güir e meus lavaret, evel ma zeot aben tri dez
Da vit Jesus da repos en gloar ar barados.

Honnes eo ar succession ha dleac'h-hu da gaout,
Evel ma meus deoc'h lavaret, da Zoue e zoc'h eur güir
vignon,
O soulaji ar beorien guès e zeot da vitàn souden.

Pa voa achuet o parlant gant eur volesti ar c'haera,
E bizach carguet a joa evel an heol a zeuas brillant

A roas e venediction da guement voa assamblet,
E presañ ar gompagunez e pign en ên gant an Æles.

An den-mâ voa qenestonet gant qeuz d'ar Verc'hes Vari,
Mantret e galon, na ell mui pa sònch piou en doa guelet,
Crial a rê epad an nôs : Mari, va c'hassit ganéc'h.

Antronos vintin e varvas an den santel eurus-mâ,
E ene gant calza joa a yas da velet hor Zalver,
Etre daouarn ar Verc'hes sacr, p'en devoa dalc'het e Mab,
E bried hac e vugale gant laouenidiguez bras;
Odeus batisset var ar plaç ur chapel da Vam hon Doue :
Ar Verc'hes Vari a drugare a invoquer er plaç-se.

Un nombr bras eus a viraclou a ra er plaç santel-màn,
Qement a ya d'e bisita, oll e recevont graçou :
Meulomp Jesus, Roue an trôn, ha Mari, e Vam guirion.

Disdostaiteta, christenien, guir tud devot d'ar Verc'hes,
Deut da recita bemde ar chapeled eus e c'hurunen,
Grêt a bemzec boqet ros fleurisset er Barados.

O Rouanez ar guerc'heset ha guir Vam d'an Doue beo,
Pedit ato evidomp evit ma vezimp pardonet,
Ma ellimp mont da repos ha d'ho meuli er Barados.

FIN.



E Montroulez, e ty LÉDAN, ru ar Pave.